



Embannet gant skoazell
Kuzul Departamant Penn ar Bed
Kuzul Rannvro Breizh



© Keit Vimp Bev – Maï Ewen
Rener an embann : Yann-Fañch Jacq
Skeudenn ar golo : Cameron Stow war Unsplash
Kempennet gant Mich Beyer
© Tous droits réservés - Pep gwir miret strizh
ISBN : 978-2-86824-331-7
ISSN : 2552-3546

Mai Ewen

**FROND
AR C'HAFED
FRESK**



2019



1

Kouezhet un tommder pounner war hor c'hêriadennoù hag ar maeziou tro-war-dro. Pas van ur mouchig-avel zoken evit distanañ an aer.

Emañ ma mamm o ruilhal he c'horf etre div renkadenn piz-du, hag o vountañ dirazi he sailhad hanter-leun. Ur voulenn ! Stlejañ 'ra he sailh hag he revr, astennet ganti he divesker war an douar.

Penaos eo-hi deuet a-greiz-holl ken tev, ken ront ? A-greiz-holl ? Moarvat ne oa ket bet remerket ganin he doare o cheñch ? Mousc'hoarzhin 'ra, perlezennoù c'hwez o tiverañ a-hed he zal hag he divjod, ha koulskoude, brav e kavan anezhi gant he daoulagad glas-nejv skedus en he dremm ken gwenn daoust m'emaomp beuzet e gor fin miz Eost.

E penn kentañ ur renkad piz-du, e disheol ar wezenn-bechez e sellan outi, souezhet. E penn pellañ e welan Mamm-Gozh oc'h ober he jestroù meilh-avel hag o kounnariñ :

– Poent deoc’h ehanañ ! Kit d’en em bakañ en ti !

– Amzer zo c’hoazh ! Dav din echuiñ ma renkad !

Ar wirionez zo gant Mammig evel-just ! Ma ne zastum ket holl he fiz-du hiziv e vint re vras ‘benn arc’hoazh ha marteze e vint nac’het gant ar c’hourater. Dalc’het ‘m eus soñj eus ar fachiri savet evel un taol-arnev etre Mammig hag ar gouraterez (keniterv-gompez dezhi koulskoude) diwar-benn piz-du kinniget re vras dezhi : « Ne faot ket din kemer ho pailhonetezoù ! Nac’het ‘vint gant an uzin. » Ha skorjet¹ Mammig : « Me ‘gavo unan all ha na vo ket ken figus e-keñver ma failhone-tezoù. » Ha kavet ur c’hourater all ganti. Marteze ne ouit ket pegen prizius eo ar piz-du, moiaen ‘vez da zastum ur c’halzig arc’hant gant ma vioc’h ur plac’h digourdi ha kalonek, ha ma c’houzañvit hep en em chalañ an heol re domm, ur barrad-glav prim, un avel reter treitour....

Hag ar voulenn da ruzañ atav he feskennoù e-ser bountañ he sailhad dirazi. Hag a-greiz-holl :

– A Ma Dou’, ma Dou’ ! Me ‘gred, me ‘gred, o ma Dou’, ar wech-mañ...

– Pet kwech zo bet lâret dija ganin ? D’ho ti ha d’ho kwele buan ! Emaon o vont diouzhtu da di Marian Stang da bellgomz.

1. E fulor

Petra 'erru ? Ma mamm, komañdet dezhi da vont d'he gwele ? Mamm-Gozh o vont da bellgomz ? Da biv ? Met ne oar ket pellgomz anezhi ! Ne oar ket galleg anezhi ! Ha dre ar pellgomz ne vez komzet nemet galleg !

Ma ne vijen ket ur plac'h seven ha savet mat, e lârjen, divergont evel ur paotr, emañ ar c'hwen o krabichañ toull o revr (resped deoc'h).

Ur paz a-dreñv, hag e taol Mamm-Gozh ur sell ouzhin, seizet dindan ma gwezenn-bechez, hag e huch evel ur vaouez kollet he skiant ganti :

– Kit-c'hwi diouzhtu da di Anna Kleuz-Beuz. Diouzhtu !

A met ! Ne garan tamm ebet an urzhioù taolet rust war-ma-gorre, dreist-holl pa ne vez rezon ebet :

– Ha n'in ket 'hat !

– Kit da c'hoari gant he merc'hed !

– N'in ket ! N'em eus ket c'hoant da vont da c'hoari ganto. Hag int a zo koshoc'h evidon !

– Penn-mul ! Sujit diouzhtu a-hend-all ho po ma dorn !

Treñ 'ran ma seulioù, mouzhet, amzer din – a-raok bout paseet ganin ar c'horn-tro – gwelet ar

gozhiadez diwisket ganti he c'hlakoù² ha kroget da c'haloupat war he chaosonoù, lijer evel ar C'had Wenn, ha ma mamm o pignat difonn diri simant e-ser brallañ ha gwaskañ war he c'hof. Sot da stagañ an div-se !

Memestra, hep kompren mann hag izel ma c'hlipenn, ret eo din sujiñ.

Met amzer zo ! N'emaon ket-me o vont da redek dindan an heol berv. N'emaon ket o vont da dreuziñ ar parkeier evit erruout buanoc'h. Hag en ur chuchual pozioù gros etre ma chik ha ma hiviz, e ruzan ma zreid a-hed hon holl gleuzioù, o sellet ouzh ar gwez hag ar brouskoad fonnus. Ar c'hraoñ-kelvez ? N'int ket azv c'hoazh, nag ar polos-kemenerien, met ar per-Taleg, yao, met ne c'hellan ket pignat ! Re uhel ar c'hleuz ha n'em eus ket c'hoant da zegouezhout e ti Anna Laorañs gant ma dilhad lous ha roget, ne vefe ket dereat, hag e c'hallfe gnañgnañgnañ, teod fall anezhi mont da guzuliañ d'am zud-kozh ez on erruet d'he zi en ur stad digoñfort... An avaloù, daoust ma kinnigont din o livioù lufr melen ha ruz ne zedennont ket ac'hanon, ec'h, c'hwerv-put, just mat d' ober chistr. Gwelet 'vo a-benn ur mizvezh bennak evit dastum ar per-Kerne, saourusañ per eus feurm ma zud-kozh. Na gomzomp mui mar plij eus per-Dudjantil al liorz, kaer zo bet din

2. Klakoù : botoù-koad skañv gant ul lêrenn

touiñ e oant bet skrapet gant ul laer, (« ha perak ne vefent ket bet debret gant ar c'hazh ? » a oa bet goapaet gant ma zad) tapet ganin ma fegement, ha rebechet ma gaou ha ma lontegezh din. Met e-keñver ar per-Kerne, riskl ebet da vout lañgajet, ken fonnus he frouezh d'ar pikol gwezenn ma ne zeuer ket a-benn da zastum an holl ber, hag e chomont da vreinañ war ar yeot, boued saourus evit ar melc'hwed hag an tousegi.

Arabab sellet war-zu an nec'h, sellit kentoc'h ouzh ho treid, plac'h, e ken kaz ma vefe kuzhet un naer-wiber o spiañ, prest da deurel he binim marvel war ho taouufern !

.....

Erruet dirak ti Anna e choman etre daou : an nor zo serret, ar stalafioù koad zo serret, nemet re ar gegin. Petra ober ? Skeiñ ouzh an nor ? Hopal ? Ne vefe ket seven. Treiñ ma seulioù ha mont d'ar gêr adarre gant ar riskl da vout chikanet ? Met setu digoret an nor, hag Anna, chichant, ur mousc'hoarzh o lugerniñ betek hec'h abrantoù o pediñ ac'hanon da zont tre. Evel pa vefe-hi ouzh ma gortoz ? Souezhus memestra !

– Deuit buan e freskter an ti, plac'hig, na chomit ket dindan ar gor. Soazig, Annig ha Didi zo o c'hoari er sulier³. Pignit ar skalier ganin.

3. Stumm lec'hel : solier

Er c'hentañ kambr emañ Pierig, babig c'hwec'h miz bennak, azezet sioul en e gavell o sunañ aketus e gnoñgnoñ⁴, hag e vamm-gozh c'hwezhet a lorc'h anezhi, o c'houlenn digantañ :

– Fais « Vive la France ! » kokoig.

Hag ar paotrig da sevel e zivrec'h :

– Vive la France ! Se zo drol, petra ' dalv ?

Digoret dor ar sulier ha setu an teir flac'h o c'hoari tiegezhig war ar plañchod gant o margodennoù. Nikun anezho ne seblant bout souezhet ouzh ma gwelet. Nikun. Ne zeuan ket a-benn da c'hoari sirius-tre ganto. Da gentañ tout ne garan ket koll ma amzer o c'hoari gant margodennoù, ha chom a ra atav war ma c'halon ar vezh da vout bet skarzhet kuit diouzh ma andor gwezenn-bechez.

Ha 'bennvare 'vo roet din droed da guitaat al lec'h-mañ ? N'emañ ket Anna o vont d'am dec'hel prizoniadez betek an noz ?

– Hopet zo bet deoc'h gant Mammig, eme Soazig, unan eus ar gevellezed.

Ul lamm war-zu dor ar c'hrignol digoret trumm ganin, hag e traoñ an diri setu Anna o huchal tra m'en en em led frond dudius ar c'hafed⁵ fresk betek ma zoullou-fri :

4. Chutig

5. Stumm lec'hel : kafe

– Ganet ho c’hoar vihan !

Darbet din ruilhal a-hed ar skalier, darbet din bountañ Anna, ha lakaat anezhi da gouezhañ. Koulskoude e c’hoarzh-hi e-leizh he c’horf :

– Amzer zo ! Chomit amañ gant ho merenn-vihan. N’emañ ket ho c’hoarig o vont da nijal kuit...

Dija e c’haloupan d’ar riskl-tamm-buhez, hag e trefuilh ma spered gant pozioù diwezhañ Anna, rak dalc’het ‘m eus soñj eus ur breurig din « nijet kuit » tri bloaz ‘zo.....

Redek a ran, kistion mui da ruzañ ma sandalen-noù a-hed ar c’hleuzioù dedennus. Galoupat a ran a-dreuz ar parkeier nevez-eostet ha klask mirout diouzh krabichoù korz hag a laka ma daoufern da wadañ. Lâret e oa bet ganin « mouchig avel ebet », ha koulskoude emañ avel flour ur c’hevrin dibar o vountañ war ma c’hein.

E-barzh kambr ma zud, trouz munut pozioù div vaouez, gouel ur babig, ha ma c’halonig rannet e seizh kant mil tamm.

Ma mamm o vousec’hoarzhin skuizh, ar c’hwez o tiverañ war he dremm goeñvet ; ma mamm-gozh o vailhurañ ur babig ken bihan, ken bihan ; ha c’hoant din-me da ouelañ evel ar babig ; dremm roufennet ma mamm-gozh troet davedon

o kinnig din bouchañ d'am c'hoar. Ar pezh a ran met doustadik, ur bouch ken flour hag un aezhenn gant an aon da foeltrañ he fasig joget.

Foei d'ar strafuilh ! Ne vo fin ebet mui d'am goulennou. Re souezhus eo e-barzh ar fin degouezh ar c'hoar-se ken hirc'hortozet. Ur c'hoar c'hoantaet gant kement a hiraezh, ur c'hoar evit c'hoari ganin, me hep mignonez nemet ma c'hamaradezed-skol, ur c'hoar evit eskemm ar pezh a vez karet ganin. Ha setu, dirak ma daoulagad bamet un draig ken bihan hag ur c'hiig bihan. Daoust hag-eñ e teu neuze em spered ez on-me seizh vloaz hag e vo atav seizh vloaz etrezomp hon div ?

Mamm-Gozh a boz ar plac'hig em... gwele, em gwele din-me, e-kichen gwele ma zud, ma gwele glas-gwer garlantezioù bodoù roz livet warnañ.

– Penaos eo-hi erruet ?

– Gant ar milichin⁶.

– Penaos eo bet gouiet gantañ ?

– Pellgomzet dezhañ gant Marian Stang ha dre chañs e oa bet kavet ho c'hoar en e jardin, en ur blokad roz.

– Amañ 'vez ivez bokidi roz a-vil-vern.

6. Medisin, mezeg

- Ne oa bet kavet nikun e bodoù-ros hor jardinoù.
- Perak emañ Mammig en he gwele e-kreiz an deiz, ha ken tomm an amzer ?
- Ken pres warni evit degemer ar babig digant ar milichin ken eo-hi kouezhet ha torret he gar.
- Ma vijen chomet ba’r gêr em bije kemeret ma c’hoar ha Mammig n’he dije ket torret he gar !
- O ! Ma Dou’ ! Pakit ho lajour⁷ ! Plac’h divezh !
- Dav da vMammig chom en he gwele e-pad pell amzer neuze ?
- ... div sizhun, teir sizhun marteze... gwelet ‘vo...
- Piv ‘raio tro-dro ma c’hoar neuze ? Ha tro-dro Mammig gant he gar dorret ?
- Me ! Torr-penn !
- Paouezomp un tammig a-raok ma tarzhe flammoù an arnev dre veg an hini gozh.
- Mammig, ha droug ho peus neuze ?
- Ya evel-just, met ken kontant on da vout roet ur c’hoar vihan deoc’h.
- Met ken bihan anezhi, ne c’hellin ket c’hoari ganti !

7. Teod

– C’hoari ? Pas diouzhtu ! Met ober ton dezhi, bouchañ dousik dezhi, komz jentil outi. Ha pa vo aet re skuizh ho mamm-gozh, marteze reiñ he bu-redennad laezh dezhi...marteze, cheñch he lienaj saotret...

O ! O ! Flourañ ma c’hoar, kudenn ebet. Met lakaat ac’hanon da dennañ kaoc’h diouzh he revr, nann met ! N’ou ket he matezh ! Met evit ar poent, serromp hor forn.

– Ur wech adarre, a huanad Mammig, n’em eus ket laezh.

Hañ ? Ne gomprenan ket. Ar saout ‘ni ra laezh, penaos e preg Mammig deus « he » laezh ?

– Re aes vefe bet... gant homañ ‘oa ar memes mod ! ‘Giz boaz e rin ar pezh ‘vo ret d’ober, hag ec’h aozin buredennoù laezh buoc’h.

Hag ur manniel c’hwerv he mouezh d’am mamm-gozh.

HOMANÑ ? Emañ o komz diouzhin ! HOMANÑ ! Laezh buoc’h zo bet evet ganin ivez pa oan babig, ha bremañ bemdez e lonkan ma gwerennad laezh met se zo normal ! Ha petra ‘vefe gwelloc’h eget laezh buoc’h ?

Hag a-greiz-holl, e teu em memor... Marian Rouz... – rouz ivez kroc’hen he dremm hag he divrec’h – war bord ar stêr-walc’hiñ o tispakañ nec’h

he saro du, hag o lakaat e beg he babig un tamm kig gwenn, ken 'oa bet darbet din semplañ o soñjal e oa ar babig o vont da begañ en e vamm... Ha me da sellet ouzh Mammig, ganti ur mousc'hoarzh goapaus war he diweuz, o c'hortoz ur goulenn digant he merc'h... souezhus, ur goulenn ha na zeuio ket a-benn da zont war beg ma zeod... e-pad pell e chomo ar skeudenn spontus-se em daoulagad ! Met dre chañs ne wad ket Marian, ha pakañ a ra adarre he zamm kig gwenn en he saro hag astenn he Domig kuilh en e baner aozilh.

– Ha piv 'aozo boued peogwir ne c'hello ket Mammig sevel gant he gar dorret ?

– Na rit ket biloù gant-se, reverez. Ne lezin ket ar familh da greviñ gant an naon.

Ur goulennig c'hoazh a-raok ma vo troet he seulioù gant Mamm-Gozh :

– Ha petra lâro Tadig pa zegouezho d'ar gêr eus e labour ? Souezhet 'vo Tadig da gaout un eil merc'h.

– Se ? Hep mar ebet ! eme-hi gant ur mousc'hoarzh tanav o teneraat he dremm e-pad ma tastum al lienaj saotret, ha ma steuz he zro-linenn zu.

Dav hen anzav, atav e talc'han keuz da vout chomet ken diseblant hag a-wechoù ken hegaset

e-keñver ma mamm-gozh, ma nenenn garet dreist, o rannañ hec'h amzer etre he labour a feurm, tennañ piz-du, he re ha re ma mamm, oc'h ober war-dro Mammig ha ma c'hoar, oc'h aozañ boued evit an holl familh... skuizh-mik met atav war ar stern... Gwir eo, ne vo mui e-pad an amzer-se kalz darempredoù etrezomp hon-div, maouez ha plac'h, flaperezed-touet, hi ken sammet, ha me oc'h ober ma fougeerez evel pa ne c'hellje ket ar bed treiñ a-zoare ma ne vijen ket bet e kamb ma zud o spiañ an disterañ fichadenn, an disterañ goueladenn, disterañ nijadenn ur gelienenn zickek a-us dremm an hini vihan...

Servijet d'am zad ha din-me ar soubenn degaset deomp gant Mamm-Gozh, – ha lonket ar soubenn a galon vat, rak deuet em soñj n'em boa ket bet ma merenn-vihan sakr – poent mont da gousket, ha neuze e krog ma spered da vout nec'het gant ar soñj eo aloubet ma gwele gant ur babig difoupet eus n'eus forzh peseurt korn eus liorzha ar milichin.

– Kousket 'rin en ho kwele, etre Mammig ha c'hwi, evel pa vezan klañv ?

– C'hwi 'raio « paillasse par terre », eme ma zad. Emaon o vont da aozañ ho kwele en ur c'horn eus ar gambr. E-kichen ar prenestr e vefe mat deoc'h, Itron ? Bremaik ho po tu da gaout ur gwele nevez, ha memes, kizellet gant Loeiz Miniou m'ho peus c'hoant.

« Paillasse par terre », pegen brav ar poz-se !
Plijout 'ra din ar cheñchamant, ha forzh penaos e
kambr ma zud e vin... nemet :

– Ha ma teu ur gevridenn d'am begañ ?

– D'am soñj ne grevo ket ar gevridenn ma teu
da vegañ ac'hanoc'h !

Kontant ken-ken da gaout ur gwele nevez, met
tri gwele en ur gambr ? Ha neuze e teu an aon
da grignañ ma c'hreiz : marteze e vin kaset d'an
nec'h, en ur gambr hep stalafioù, e-lec'h ma teu
da rodal an Itron Loar, enebourez ar vugale vihan.

Ken pounner an heol e dibenn an hañvezh-se !
Ar stalafioù a chom serret evit derc'hel un tamm
freskadur er gambr. C'hoari 'ran da sailhañ gant ar
skinoù heol flistret diouzh ar stalafioù.

– Ha loened e vefe er skinoù ?

– Met pas, an huzenn ha setu.

Poultrenn en ur gambr naetaet bemdez ? Ha
sailhat a ran evit lazhañ al loenidigoù-se e ken
kaz e teufent da heskinañ ma c'hoar, en aner evel-
just, ne ran nemet diblasañ anezho un tammig.
Ne c'hellan ket hep poan, me ar galouperez mil
gwech chikanet, kuitaat ma mamm ha ma c'hoar,
daoust d'am hiraezh. Souezhet ac'hanon pa welan
ma mamm o sevel evit mont war ar sailh, goût 'rit,
an dra-se a vez lâret dioutañ « ar jules ».

– Neuze e c'hallit kerzhet ?

– O ! Gant poan, siwazh, met marteze n'eo ket bet torret ma gar, foeltret ha bloñset nemetken.

Ha setu-hi oc'h en em bakañ en he liñselioù gant ar pallennoù savet betek he fri daoust d'an tommder.

A-wechoù, pa gemer ma mamm pe ma mamm-gozh an hini vihan evit reiñ he buredennad laezh dezhi em befe droed d'he c'hemer em divrec'h met ken ankeniet an div vaouez ma kemeran aon ivez da lezel anezhi da gouezhañ. Ha ma torrfen anezhi !

Sur e soñj Tadig evel-se ivez, aon da derriñ e verc'hig nevez, rak ma chom pellik amzer o sellet outi ha ken tener e vousec'hoarzh, ken skedus e sell, ne gred ket kemer anezhi en e zivrec'h. « An tadoù 'vez diampart, eme Mamm-Gozh, rok. Ober war-dro ar babigoù, se 'vez labour ar maouezed. » Ne respont ket Tadig e c'hell bout ur blijadur emgar evito ivez !

A-wechoù, e-kreiz an noz, e tihunan gant trouzioù munut : ur gouelig, huanadoù Mammig, Tadig en e sav, trolinenn Mamm-Gozh e gouloù morlivet al lamp-petrol flærius, hag e savan ma fenn evit gwelet petra zo erruet. Sioulaat 'ra ar gouelig hag ar chuchu, ha stouiñ a ra Mamm-Gozh a-us d'am « faillasse ». Pozañ 'ra al lamp war ar

plañchod ha flourañ ma fennad blev fuilhet en ur guzulikat : « Kouskit ‘ta ma loenig. N’eus netra », hag e santan war he dorn, war un dro ken dous ha ken rust, frond ar soavon hag al laezh, frond emrousted ha karantez ur vamm-gozh. Kemer ‘ra al lamp adarre, diblegañ skuizhder he c’horf treut, hag he skeud a zamwelan o vont doustadik war-zu ar gegin : « pfffou ! » Lazhet ar gouloù. Serret an nor-porz. Soñjal ‘ran em mamm-gozh o trotal en noz – n’emañ ket o chom gwall bell diouzh hon ti – ha soñjal ‘ran : « Gant ma ne gavo ket Yann-Boned-Ruz nag ar C’had Wenn war he hent, nag al labous-fr... rrrzzzz...

Evel-se e tremeno hon devezhioù etre eürusted, anken, hegasted ha hirnezh.

.....

Ha setu komzet eus ar « badeziant ». Petra eo c’hoazh an dra-se ? Atav e vez rebechet ma goulennoù din, met penaos e c’hellfen chom diseblant pa flistr dre o muzelloù gerioù biskoazh klevet ? Dav dezho respont, ar re-se hag a oar an holl draoù. Dav din memestra kaout un deskadurezh all eget hini ar skol !

– Gwelet ‘vo ganeoc’h pa erruo !

Nag a gevrinoù difoupet em zi gant donedi-gezh ma c’hoar vihan !

Dav deoc'h bremañ heuliañ pizh : evel-se e teskan e vo Mamm-Gozh Kerneant mamm-baeron ha Tad-Kozh du-mañ tad-paeron d'am c'hoar. N'em eus ket da vout avius peogwir eo ma Nenenn du-mañ ma mamm-baeron, ha Tad-kozh Kerneant, ma zad-paeron. Aes-tre da gompren, neketa ?

A-raok ar sapre badeziant-se, ur gwall labour zo ret deomp gober, da vMammig ha din-me : kargañ drajez roz (roz peogwir eo ur plac'h, hag ar re blat, ar re gerañ met ar re saourusañ, hervez Mammig) e kernioù roz ivez, serret gant ul las, roz evel-just. Start evidon d'ober skoulmoù-dall, met ret eo deskiñ. Ar c'hernioù-se vo roet d'hor c'herent, d'hon tud nes, d'hon amezeged...

– Ha tañva a c'hellfen « un graje » ?

– Lâret 'vez « une dragée ».

Ne vern din « un », pe « une » ! Unan hepken zo re nebeut a dra memestra, atav blaz ar re nebeut gant ar madig dibar-se ! Taolit evezh ! An dent ! Met Itron Vammig ne skop ket anezhi kennebeut war ar « grajeoù », ha souezhet e welan anezhi oc'h ober ur mont-dont d'he gwele betek an armel e-lec'h m'emañ staliet ar pakadoù bras, ha d'an armel betek he gwele e-lec'h ma fardomp ar c'hernioù. Adkavout 'reomp ur wech bennak ur c'henemglev dudius, an didrouz a-boan lusket

gant hor chuchu, gouelig ma c'hoar, huanad ma mamm (he gar a ra droug dezhi atav), fraoñv ur gelienenn zireizh, betek ma teuio Mamm-Gozh da droc'hiñ hor penn-ouzh-penn. Ne c'houlenn ket Mamm-Gozh un drajezenn bennak, ne rafe ket a vad d'an nebeud a zent a chom c'hoazh da vrallañ en he zoull-rastell.

Bez 'vez tud all ivez, anvet pe dianav din, o tont da welet ma mamm ha dreist-holl ma c'hoar, hag int da estlammiñ droch e-ser juntañ o daouarn : « O Aotrou Dou', ar babig koantik-se ! Da biv e tenn-hi ? Peseurt anv 'vo roet dezhi ? » Ha me, ne gontan mui ! N'on netra mui ! Steuziet ac'hanon ! Eüruzamant ne chom ket pell amzer an dud divergont-se ha da di Mamm-Gozh ez eont, pedet anezho, daoust d'he labour dreist, da gemer o merenn-vihan.

Gwashañ tra memestra : pa zeu ar milichin d'ober ur sell d'am mamm ha d'am c'hoar. N'em befe ket tu seul gwech d'e welout o tont na da gavout an amzer da vont da guzhat. Atav ur sac'h-lêr du gantañ (hag e-barzh ar sac'h strizh-se e oa bet degaset ma c'hoar deomp ?), hag e flour an den-se ma fennad blev. Dre chañs e kavan an tu da ziwall diouzh e vuzelloù druz prest da vouchañ din. Ha krediñ 'ra deoc'h eo bet disoñjet ganin « ma amidaloù » troc'het ha troc'het ken fall ma chom atav un tamm kig da stankañ ma gourlañchenn ?

« Nous arrangerons cela ». Kit da grediñ, ya ! Ha lezel ac'hanoc'h da frifurchal c'hoazh em beg ? Hag an droug ! Ha ma mamm o yudal « Vous allez la tuer ! », hag ar milichin daonet-se o flac'hatañ Mammig en ur vlejal « Idiote ». Hag hennezh, an den fogn-se oc'h ober war-dro ma c'hoar bremañ gant ar c'hoant marteze da zilemel hec'h « amidaloù » ! Ha marteze, piv oar, da lakaat anezhi da « nijal kuit » evel ma breurig ? Loen gouez !

Dinec'het erfin pa welan ar c'hozh mezeg o kuitaat ma zi gant e eurier-boursikod aour war e gof tev, e roched kazi 'maez e vragoù strizh ha teuf-teuf... o pellaat erfin gant e wetur flærius.

Dav din lâret memestra da vMammig teurel evezh ouzh an den-se, memes ma flour he blev dezhi e-ser lâret « Ma petite fille ». Den pilpous !

.....

Ha setu erruet an devezh bras dediet d'am c'hoarig : he badeziant !

Mamm-Gozh a chomo er gêr evit fardañ ar meuz. Mammig, dre gaoz he gar foeltret ne c'hall ket mont betek ar vourc'h, memes en oto, met kontet 'vo pizh an abadenn dezhi. Gwisket ar babig gant ur sae hag ur boned souezhus met dibar gant o danvez tull, ken tanv hag ur gwiad-kevnidenn, embrodet, ur bam ! Ha n'em eus ket ezhomm da

vout jealous, rak evidon-me 'oa bet graet ar sae hag ar boned-se, ha normal eo e prestfen anezho d'am c'hoar, pas ? Netra da rebechiñ, nemet an anken ma c'hellfe ar babig rechetiñ he laezh trenket war « ma » bavoar brodet ha « ma » sae vadeziant.

Pegen souezhus al lid-se ! Kleier an iliz o seniñ, e-pad ma skroañj an hini vihan pa ra an den – gwisket hemañ en ur roched gwenn-kann brodet o tamc'holeiñ ur sae zu nozellet azalek e doull-goûg betek e c'halochoù – , e jestroù fentus e-ser komz en ur yezh estren, na brezhoneg, na galleg. Den ne ra van ! « Chitit 'ta », eme Mamm-Gozh Kerneant, gant an aon ma tidalpfen da c'hoarzhin. Eoul, dour, hollen strewet war dremm ar plac'hig skorjet ! Gwall inervet on o welet ar mizerioù graet d'ur bugelig ha na c'hell ket en em zifenn, nemet en ur grial he fulor. Hag ar c'hleier a gen-dalc'h da vrallañ bouzarus.

Erfin e teuomp er-maez eus al lec'h souezhus-se, ken yen, ken pompus gant delwennoù cheuc'h diniver, ha ken kriz ivez gant ur paourkaezh den treut ha noazh, staget ouzh ur groaz gant tachoù merglet.

Bez 'zo bet tennet ur poltred ? N'ouzon dare. Perak e chomo da viken skeudenn hor strollad renket brav dindan porched an iliz ? Ma zad en e zilhad Sul, me gwisket gant ur sae c'hlas marellet a vleunioù bihan, ma flezhennoù staget war beg ma

fenn gant ur pezh mell seizenn wenn, ar vamm-baeron o stardañ he friñsez ouzh he c'halon, hag an tad-paeron fier evel ur c'hog ken ma vagan c'hoazh un taol avi rak ma zad-kozh karet an hini eo, ha perak ne vefe ket bet eñ ivez ma zad-paeron din-me ?

Leun-chouk an diri dirak an iliz, bugale oc'h en em vountañ dirazomp ; ma zad o lakaat em daouarn drajeoù ha pezhioù moneiz. « Taolit anezho d'ar vugale 'ta ! » Hañ ! Teurel traoù ken priziuz d'an divergonted-se ? Ma ! Sellit outo, o krial, o laerezh drajeoù hag an argant digant ar re all... « Chas ar vourc'h », a chuchu Mamm-Gozh Kerneant e-ser derc'hel war he mousc'hoarzh chichant.

Petra 'oa erru war-lerc'h ? Ankouaet ganin ! Nemet ar soñj diboaniet eo bet restaolet he bugelig d'am mamm, hag e kendalc'ho an devezhioù eürus, ar mont-dont etre ar gwele hag armel an drajeoù, ha disammet bremañ, rak kazi-pare he gar d'am Mammig, ne zeu Mamm-Gozh en ti nemet evit ar blijadur d'hor gwelet ha d'ober ton d'he merc'h-vihan nevez.

Traoù a chom c'hoazh d'am lakaat diaes. Perak e chom-hi ken bihan ?

– Met kazi eizh lur e poueze-hi ! Ha c'hwi kalz bihanoc'h ha treutoc'h e oac'h, ken ma veze lâret gant teodoù fall ne vefec'h ket chomet bev !

Mat ! Dre faot ar milichin daonet e oa neuze, dibosupl d'ar feneant kozh-se kavout ur babig a-feson en ur blokad roz ? (Gwir eo, ne vleugn ket ar bokidi-roz e miz Genver) Ha bet c'hoant gantañ da lazhañ ac'hanon en ur dennañ ma amidoù !

– Ha perak blev gwenn dezhi ? 'Giz ur vaouez kozh !

– Se ! Met c'hwi ivez oa blev gwenn deoc'h, ha setu gell-du ho plev bremañ. Ha me ivez zo bet ganet gant blev gwenn ha ma breur Iffig ivez, ha ken du e vlev bremañ !

E-pad ma tro ha ma tistro goulennoù hep ehan em fenn, goulennoù ha na vo respontet dezho nemet gant un huanad hegaset pe gant ur respont gouiet mat-tre ganin e vo gaou, e ya ar vuhez war-raok, an hañvezh doustadik o treiñ war-zu an diskaramzer, ar vakañsoù oc'h echuiñ evit reiñ o flas reizh d'ar skol. Ha dont a ra ur wech 'n amzer em spered em eus bevet fin un hañvezh dispar ?

Dav 'vo din kuitaat ur pennad eürus eus ma bugaleaj gant ar santimant n'on mui ur plac'hig, met ur plac'h vras seizh vloaz en ur familh gresket.

.....

– Petra 'zo bet graet ganeoc'h e-pad ar vakañsoù hañv ?

O c'hortoz peseurt respont emañ-hi ? Al lod brasañ eus ar vugale zo bet o tennañ piz-bihan, piz-du, dastum avaloù-douar ; hag ur Sulvezh bennak, burzhud, gant an trêñ-patatez, pe oc'h ober ur valeadenn gant an otokarr war bord ar mor ; aliesoc'h o vourboulhat er stêr ; o reseviñ evel priñsed kendirvi deuet eus Paris pe Naoned.

Emaon o virviñ :

– Me zo bet degaset ur c'hoar vihan din !

– Kontant oc'h neuze ?

Penaos e c'hall an dud deuet goulenn seurt traoù ken droch ?

– O ya ! Met gant Mammig 'zo bet torret he gar.

Perak displegañ ma santimantoù dirak ur c'hlasad diseblant : an holl vugale zo dija unan, pe daou vreur, pe div c'hoar dezho....Evel boas, derc'hel evidon ma zrivliadoù pa ne c'hellan ket rannañ anezho ?

An deiz war-lerc'h :

– Piv zo bugel nemetañ ?

– Me ! ha da sevel ma biz.

C'hoarzhadeg evel-just.

– Met dec'h e oa bet lâret ganeoc'h e oa bet ganet ur c'hoar deoc'h !

Setu ur statud nevez din neuze. N'on mui bugel nemetañ. Tañpir.

E-pad an diverr-amzer e tosta ouzhin ur paotr eus ma rannad :

– A ! A ! Torret he gar gant ho mamm ? O, babig sod !

Ur plac'h vras eus klas ar Sant-Fikad⁸ he deus klevet ar paotr goapaus :

– Serrit ho forn, penn-brell ! 'Erruo un deiz ma vo torret o gar gant ar baotred kentoc'h eget gant ar merc'hed ! Ha justis evidomp ba' fin !

Ne gomprenan mann, ha ne ran ket foutre-kaer, goût 'ran mat-tre ne vez ket desket an holl draoù er skol, ha me tanv ma divskouarn, e teuin a-zeiz-da-zeiz da gompren ar vuhez.

.....

Ankouaet ganin lâret anv ma c'hoarig : Nin a vez lâret outi, ha Ninig pa vez moumounet, poket dezhi, bouchet, flouret... Ar briñsez Ninig pa asant pozañ war ho jod un añ⁹ gleb... Ha Nin dudu pa lak da strinkañ pouloud he yod gant he loa diampart war ma c'haieroù-skol.

8. Certificat d'étude, un diplom a veze gwechall e fin ar skol kentañ derez. E brezhoneg e veze anvet sant-Fikad pe santifikad, dre fent..

9. Pok, bouchig

... Pa zeuoc'h da vout brasikoc'h, pa ouioc'h kerzhet ha galoupat, ha dont 'reoc'h ganin da bourmen dre ar parkeier, dont 'reoc'h ganin betek ar stêr, dont 'reoc'h ganin da zastum lus e koadoù Kaskadeg ? Diskouez 'rin deoc'h diehan, teñzorioù hor glad hag hon endro, ar bokidi hag ar gwez, ma neizhi ha ma bili, ha selaou a raimp, koachet a-dreñv ur bodad balan, kan trutennus al lapousig Sant-Per o nijal eeun-kaer war-zu an Neñv glan. Aozañ 'rin deoc'h war ho plev aour ur gurunenn a zelioù kistin, hag e valeoc'h neuze ho kalite etre blokadoù brug evel ur briñsez m'oc'h, evel pa chomfec'h ar briñsez Nin da viken...

O ! Na lârit ket din « ada »¹⁰, ma Ninig ! Chomit gant ho c'hoar vras ur pennadig-amzer c'hoazh ! Kement a draoù a chom ganeomp c'hoazh da aozañ ha da fardañ !

10. Kenavo

2

Ret din pellaat diouzh an engroez a grog da aloubiñ ar sal-debriñ.

Lakaat 'ran ma fouez war ar bank dirak ar siminal didan. Dav din ma gwareziñ diouzh an dud : ma gwaz em c'hichen war ma zu kleiz, ma mamm etre ma div verc'h... Dirakomp ma mab ha ma nizezed, ma filhorezig, ur gador dalc'het evit ma breur-kaer. Ne vo evel-se den ebet gouest da zont betek ennon d'am heskinañ gant e bozioù glac'haret.

Krediñ 'ran eo bet kemeret ganin ar gwellañ plas evit chom hep bout direnket em eñvoriou mantret. Hor familh, hec'h unan, unanet, unvaniet en he c'hañv, krignet gant ur chagrin divuzul.

D'am breur-kaer an dever kriz da resev ar gouvidi, da zistag ur ger bennak, ha d'o fediñ da azezañ dirak ur plad hag ur werenn, goullto evit ar poent.

Piv int holl ? Bez 'zo tud evel-just anavezet ganin abaoe pell 'zo... ha reoù all, koshoc'h pe yaouankoc'h. Piv int ? Ne ran forzh. Un het nemetken : ra ne vo ket tostaet ouzhin ganto, ra ne glaskint ket pokañ din, ra vo dalc'het en o begoù o fozioù frealzus ha na c'hellint ma frealziñ e mann ebet. Skarzhit ! Koazezit ha peoc'h ! Lezit ac'hannon em soñjoù troet war-zu un amzer dremenet mesket gant an amzer vremañ.

Nag a reuz ! Nag a drouz evit kemer ur gador ! Dre ma daoulagad brumennet e verzan ur mousc'hoarzh a-wechoù ; a-wechoù e strink ur c'hoarzhadenn, mouget prim a-dreñv un dorn.

Deuet eo-hi, honnezh-se, a-benn da dostaat ouzhin !

– O Doue ! Ho c'hoar ! Ma mignonez ! Pebezh glac'har !

– Ya, ya...

– Ne ouien ket e oa ken gwall-glañv !

– A ?

– Hag ho mamm ! Peseurt taol vil eviti !

– Me 'gred, ya !

– Goût 'rit e rannan ho poan.

Rannañ ma foan ? Piv en defe droed da rannañ

ma foan ? Ma foan zo din-me, din-me ma-unan, emgar, o trailhañ ma c'halon. Penaos e c'hellfen-me da skouer rannañ poan ma mamm, pe poan n'eus forzh piv eus ar familh ? Da bep hini e boan !

Krediñ 'raen bout gwarezet, met tud 'zo, barrek da dostaat din, ha dav din bout seven, mallozhtou, p'emañ an toull o ledanañ em c'hreiz. Hag adarre e tiver an dour war ma divjod.

Erfin, sioulaet an trouz, azezet an dud dirak ur pladad kilhevardon. Kargañ 'reont o gweren-noù gant gwin, dour, chug-frouezh. Vad a ra d'ar c'hreuz, neketa, war-lerc'h kement a from, ha ni 'zo bev, ni !

Doue, ne gredan ket ennoc'h, koulskoude ne ehan ket ma spered da c'houlenn, Doue, perak ? Ne oa ket tu deoc'h lezel dezhi ur pennadig-amzer muioc'h e peoc'h (e peoc'h ?), dousaet he foanioù gant ar morfin ? Ne oa ket tu deomp kaout spi en ur burzhud hag en defe dalc'het anezhi en he flom dre-c'bras hec'h orgouilh, ne oa ket tu deomp hunvreal ne oa ket dav dezhi mervel ken abred ?

Sellet 'ran ouzh ma asiedad hep ober van zoken da zebriñ un tamm. « *Ne dañvait ket an andouilhenn, c'hwï hag a zo sot gant an andouilhenn ?* » hag ho c'hoarzh goapaus a darzhfe.

Penaos e c'hell an nen debriñ ?

Un taol-lagad war-zu ma mamm gaezh. O tebriñ emañ ! Ha feuket e heuilh ma daoulagad he jestroù. He fourchetezenn d'he genoù ha chaokañ 'ra aketus he boued. Ha dre sevended e vefe ? Ret 'vez ober van da vezañ diseblant ? He merc'h zo bet devet ur pennadig-amzer 'zo, hag e c'hell-hi debriñ ! Paourkaezh Mammig ! Paourkaezh Nin ! Paourkaezh ac'hanomp ! Paourkaezh re a gare ac'hanoc'h ! N'ouzon ket c'hoazh eo bet dija skoet didruez spered ma mamm gant ar c'hleñved-divemor – abaoe pe vare ? Na ma c'hoar na me, n'hon eus biskoazh soñjet e c'hellfe hor mamm gouzañv ar c'hleñved-se, daoust ma lârempe e kavemp drol ha souezhus a-wechoù he doareoù hag he fozioù. « An oad eo ! Dav deomp en em voazañ ! » Met perak, perak, me, ne c'hellen bout nemet hegaset ha nompas war evezh, pa huanade-hi seul gwech : « Souezhus eo memestra ne zeu ket pare mikozoù Nin... abaoe an amzer ma padont ! ».

Lonkit 'ta tudoù, lonkit peogwir oc'h bev ! Evit 'ta tudoù, evit skubañ ho chagrin ma 'z eo gwir e vagit chagrin !

Tuchant 'm eus klevet den-ar-forn o lâret : « Dav d'al ludu yenaat. Kontit tro-dro peder eurvezh. »

Al ludu ? O yenaat ?

Nebeut-ha-nebeut, e-pad ma tebr ha ma ev an engroez, e sav ar mouezhioù kreñvoc'h-kreñvañ. Lod zo eürus d'en em welet adarre, war-lerc'h kement a vloavezhioù tremenet. Mousc'hoarzhoù a vleugn war ar muzelloù ; ar jodoù a zeu roz gant an evadeg. A-wechoù e strink ur c'hoarzh. Dre chañs e vez kañvoù evit kaout darempredoù adarre ! Dre chañs, a ya !

KAZ 'm eus ouzhoc'h !...

Met pas, ne argarzh an den ebet, nann, nann, n'eo ket ret d'ar gasoni kemer ur plas c'hwerv em c'halon.

Bremaik, er sal-lid, pa oa ar muzik karet gant Nin o seniñ flour, en ur parfeted troc'het gant ru-fladennoù ha huanadoù, e oa tarzhet ur yudadenn spontus : « Mamm-Gozh ! » hag he doa lakaet ac'hanon da sevel evel ur Jannvlev, evit stardañ ma filhorez-vihan em divrec'h, koachet he dremm koeñvet dindan ma c'hazel, dindan ma eskell, evel evit mougañ he glac'har. Met bugel, n'on nemet ho maeronez ha n'em eus ket droed da gemer lec'h ho mamm-gozh en ho kalonig frigaseta.

Hag evel-se e vez graet el lidoù-se, pediñ ar familh dost da sellet ouzh an arched o teviñ ? Eüruzamant he deus bet amzer ma merc'h da skarzhañ he skasoù gant ma mamm ha ma filhorezig. Met, me ! Chomet on da welet, seizet, sklaset, – ha goût

‘ran ne steuzio biken skeudenn euzhus an arched ennañ korf merzheriet ma c’hoar er flammennoù bras o roc’hal. Ha dre doull ar siminal, a-gevret gant ar maged, hag-eñ e nij kuit hoc’h ene ?

Tuchant Ninig e vo strewet ho ludu war takad grouan gwenn Liorzh ar Memor. Goût ‘ran matre, goût ‘ran petra ‘oa ho tiviz rik, lakaat ho korf debret gant ar c’hrign-bev da vont da netra.

Ya, hoc’h ali abaoe pell : bout devet. Ha ni da c’hoarzhin glas :

– Hag un ene e vefe e-touez al ludu ?

– Hag un ene e vefe e-touez an eskern ? Devet ‘vin, hag e nijo hag e tarnijo ma ene, ha taolit evezh ma yelo d’ober he neizh e-barzh hoc’h ene deoc’h !

– Droch ar pardon !

Met an diviz kriz-se... strewiñ ho ludu ! Penaos lakaat ur vleunienn, ur boked war ur grouan resevet kant mil gwech ludu a-vil-vern, skubet hep ehan gant barradoù-glav ha taolioù-avel ?

Tuchant, gant unan eus ma bugale pa vo echu merenn, e vo dav kavout buan an tu da skrapañ ma mamm ha da gas anezhi diouzhtu d’ar gêr, a-raok ma vo adarre an dud o tistreiñ war-zu Liorzh ar Memor.

Tremen 'ra an amzer. Evañ. Debriñ. Eskemm. Ur c'houviad a-wechoù a sav evit mont da vouchañ d'un anaoudegezh. Perak e c'hallan-me bout war un dro diseblant, war evezh, ha magañ c'hwervoni ?

Sellet 'ran ouzh un dremm, sellet 'ran ouzh un dremm all. Piv a vag chagrin ? Piv a vag keuz ?

Ugent vloaz muioc'h dezho, met hep poan ec'h anavezan anezho hag e vez ma spered en eñvoriou.

Pedet e vez alies ganeoc'h ho mignoned niverus, ho c'hoar hag ho preur-kaer. Goañv pe hañv, er sal vras, e flammin atav an tan war an oaled ; ken dous e vez an nozvezhioù e tommer ho hegarated. C'hoarzh, istorioù droch, eskemmoù diwar-benn ar muzik, ar politikerezh, al labour hag ar vugale. Pa sav un tammig re uhel ar mouezhioù, pa ne vez ket pell an tabut da darzhañ, un taol muzik ha kan gant hor c'hamarad Besson, pe Stivell, pe Branduardi, hag e vez fistilhet e sioulder adarre. Met komz diwar-benn al levrioù e vez an eskemm plijusañ etrezomp ar merc'hed. Karet 'rit kaout en-dro deoc'h un aergelc'h a fiziañs hag a vignoniezh, ha me, loen sovaj kentoc'h, e teuan da gavout plijus ivez an endro hag ho mignoned, ha bamañ 'ran rak hoc'h aester da lakaat ho kouvidi en o bleud.

*Petra eo deuet da vout ma mignoned
ken tost dalc'het
ha ken karet¹¹...*

11. Kanaouenn Léo Ferré : *Pauvre Rutebeuf*.

Kentoc'h eget distanket, tec'het kuit ganto, steuziet, p'eo kouezhet warnoc'h arnev ar freuzstal. Gwerzhed ho ti degemerus, ha dav deoc'h mont da chom en ur gêr all, en ur rannidi strizh ; dav mont ur pennadig-amzer d'ur vro estren ; dav dont adarre hoc'h-unanik, aet gwan ho korf hag ho spered gant an hinad didruez.

A-wechoù e tegouezh ganin kejañ ouzh ur vignonez a wechall, o c'houlenn pilpous ha strobet:

– Ha penaos emañ kont gant Nin ? Ne ro keloù ebet.

– Kit d'he gwelet. Pellgomzit dezhi.

– Marteze c'hoant ebet da gaout darempred ganin ?

– Met kit da skeiñ ouzh he dor !

– Ne zigoro ket din marteze. Lârit « bonjour » dezhi eus ma ferzh.

– Ha ne rin ket. Kit-c'hwi d'he gwelet. Penaos e c'hellfec'h goût ne zigoro ket deoc'h, ma ne skoit ket ouzh he dor ?

Dilezet e-pad ugent vloaz, ha setu anezho holl, beuzet o daoulagad, o ruflañ en o mouchouerioù... Ar chagrin ? Ar morc'hed ? Met, piv 'oar, ur chagrin dreist a vagont marteze, ha me direizh ? N'ouzon ket, n'ouzon ket... Piv a c'hallfe muzuliañ

ar glac'har ? Piv on-me evit lâret e vagan muioc'h a chagrin eget da skouer, ma mamm, ma nizezed, ma bugale, ha n'eus forzh piv eus ho mignoned gwechall ? N'o deus ket ankouaet ac'hanoc'h peogwir int deuet evidoc'h, war-lerc'h ugent vloaz paseet.

Re rannet ma c'halon gant ar boan, ne lezan ket ar c'hwervoni da c'holojiñ ar boan.

Dav ober van da vout diseblant. Dav eseañ skubañ an eñvoriou eus ma memor.

Tuchant, war-lerc'h bout strewet al ludu, war-lerc'h ur pennadig a barfeted, e vo sur ur vaouez bennak, o tifronkañ e-ser displegañ ur varzhoneg fardet ganti pe gant ur barzh bennak. Ha me, n'em eus netra da lâret, met trumm em spered e tarzho un haiku diampart, ur seblant a haiku na vo disoñjet biken ganin :

*An tan en arched
Al ludu strewet-
Richan ar pintig er c'hoad.*

Rak dibabet zo bet gant ar Blanedenn lazhañ ho korf e deroù an nevezamzer.

Ne bregimp mui eus ar bleunioù, eus hor c'harantez dreist evit ar bodoù-kamelia. Ne brofoc'h mui d'ho c'hoar bleuñv-orkide, ar vleunienn karet dreist ganti hag argarzhed ganeoc'h. Klevet 'rin atav ho c'hoarzh goapaus : « *Goût 'rit petra 'dalv ar*

ger « orkide » ? » Ho c'hoarzh a deuz, ur roc'hell a flistr diouzh ho toull-goûg, hag ur paz spontus a grog da deurel hep fin he skolpennoù raouliet.

– Mallozhtoupenn ! C'hwi gant ho putun mil-liget ! Pe vare e vo komprenet ganeoc'h ?

– Peoc'h gant-se ! Na rit ket biloù ganin. Ma yec'hed zo din. Ne sell ouzh den.

– Pas posupl 'ta ! Tamm tra droch, ho yec'hed a sell ouzhomp holl !

Ha dalc'het ho peus soñj eus ho tad-paeron, hor Peper deomp-ni ? Dont 'ra pa vez brav an amzer war e chaosonoù feltr, berr e anal, ar skuizhder merket war e zremm gastizet, ha koazezañ 'ra dirak hor jardrin, war ur bank maen ledan, dindan ar pezh a vez graet ganeomp an « disheolienn ». Gant Tadig e oa bet fardet gant ur peul houarn hag ur rod-karr un dra brav-kenañ pa zeu bokidi-roz-pompoñ ar c'hleuz da ziverañ o blokadoù betek an douar.

Un tamm diskuizh 'ra Tad-Kozh a-raok mont d'ober tro-dro e barkeier. (Ne yelo ket, ar skuizhder vo mestr warnañ, chom 'raio ar parkeier hep gwelet an ozbac'h). Eürus da flepiñ gant e ziv verc'h-vihan.

– Ninig, ma loenig, marteze e yafec'h da glask ur pakad butun gris d' ho tad-paeron e stal Marian Stang ? Butuniñ 'rafe vad din.

– Ya, ya, diouzhtu Peper.

*Hag ur sell du a daolan warnoc'h rak difennet-
groñs eo bet gant Mamm-Gozh sujiñ d'e c'hoant
diboell.*

– Emichañs 'm eus argant a-walc'h.

*Hag e ro d'e verc'h-vihan un dornad pezhioù
moneiz. Gout 'reomp, ne vez ket kalz argant en e
chakodoù, Mamm-Gozh zo mestrez pizh war-se.
Hopala, ne vez ket dav dispign e traoù didalvoud, ha
dreist-holl e butun-kaoc'h-ki-se.*

*A-boan kuitaet, dija erruet gant ar pakad prizius,
ha restaolet ar pezh a chom eus an argant.*

*– Met dav 'oa deoc'h prenañ madigoù gant ar
restad ! »*

*Ha pas ! Ar gont eo ar gont. Ha petra 'dalv an
argant e-kichen al lorc'h d'ober plijadur d'he zad-
kozh ?*

*Hag outañ e sellomp, evezhiek, o rollañ e sigare-
tenn hag o lipat anezhi. Gwalleur, direnn ebet ! Ul
lamm betek an ti ha deuet an Nin gant ar voestad
alumetez.*

– Din-me da enaouiñ ho sigaretenn.

*– O Ma Dou' ! Aon 'm eus memestra, na devit ket
ma fri din atav !*

Ha c'hoarzhin a reomp, eürus gant e eürusted da vutuniñ e damm poezon, e sioulder an hañvezh, an diwezhañ hañvezh bevet gantañ. Ne raio mui tro e barkeier. Ne raio mui un halad butuniñ dindan an disheolienn bokidi-roz.

Hag amañ er sal-debriñ ne vez ket butunet, daoust d'an difenn ? C'hwezh moged butun a zirenk ac'hanon ; eñvorioù kriz a zeu da drubuilhañ ma spred. Met n'eus den o vutuniñ ! Dont 'ra ar c'hwezh pa vez digoret an nor o rannañ ar sal hag an davarn.

Ur pladad saladenn, ur pladad fourmaj-laezh, ur pladad frouezh... Pe vare vo echuet ar pred-se ? Perak e talc'h ken kreñv ar giz da bediñ tud an obidoù da gemer ur pred, un tasad bennak ?

Buan, buan, mont er-maez. Ra zeuio al lid diwezhañ. Ra zeuio an noz. Ra vo kousket ganeomp ur berad e peoc'h, evit kavout an nerzh da vont war-raok en desped d'ar chagrin.

Koulskoude, pet kwech anavezet ar pennadoù spontus-se ?

Ha soñj ho peus eus Tadig, azezet e penn uhelañ an daol, war e gador-vrec'h, fier evel un ozhac'h, o spiañ didrouz e familh durmudus, e abardaevezh joiaus Gouel ar Mammoù, o vousec'hoarzhin

sioul daoust d'an diotachoù ha d'an istorioù droch taolet evel boas. Un nebeud eurvezhioù war-lerc'h, marv-mik gant ur freg-kalon.

Perak, e koulz ma buhez-holl, pa vez gwelet ganin un arched e teu em memor ur pennad eus barzhoneg Baudelaire, « Kan diskaramzer » ?

*Kavet 'ra din, luskellet gant ur stok unton
'vez tachet buan un arched en un tu bennak
Evit piv ?¹²...*

Hag atav e vez tachet ar golo war an arched ?
Ha tachet e oa bet ivez ar voestig glas ma oa kousket ma babig-me da viken ?

Ma c'hoar an hini eo, e morg an ospital, astennet he c'horf teuzet a netra en arched. Ha klevet 'rit difronkadennoù ho familh o strinkañ en-dro deoc'h ? Ha dav deomp gouzañv an diresped, ar goap diwezhañ d'ho kabellañ gant ur berrukenn zu rodellet ! C'hwi ken fier ha koant gant ho pennad blev melen hir ? Ne faot ket deomp ho kwelet evel-se ha buan e vo serret ar voest. Steuziet ho skeudenn. Ne chomo en hor memor emichañs, nemet skeudenn ur vaouez kran daoust d'ar c'hranked a grigne he c'hreiz.

12. Barzhonegoù Baudelaire : *Chant d'automne* ; *L'invitation au voyage*

*Evit piv ? Dec'h oa an Hañv ; setu ar fall-amzer
An trouz kevrinus-se 'son evel ur c'himiad.¹³*

A-wechoù, euzh, e teu em spered ur soñj farsus, rak goût 'raec'h teurel istorioù goapaus, hag aon a gemeran da zidalpañ a-greiz-holl da c'hoarzhin.

Ne c'houzañvit ket an druez, ne c'houzañvit ket ar pozioù flour, ne c'houzañvit ket ma vez diskouezet hor c'harantez deoc'h. Ha komz eus ho yec'hed ?

– Penaos 'mañ kont ?

– Mat-tre, netra da lâret. Ha c'hwi, ho taoulagad ? 'Benn vare 'vo an oberatadenn ?

– Goulenn 'ran-Me diganeoc'h doare eus Ho yec'hed-deoc'h ?!

– O, peoc'h ! Emaon o vont da aozañ te ; prenet 'm eus evidoc'h, marlonkez, ur « mil-delienn », ho kwastell muiañ-karet.

Neuze, sioulaet hon-div, e vo preget eus n'eus forzh petra. Ha krak ! Ur sigaretenn enaouet trumm, da betra servijfe dioueriñ d'ar blijadur dreist-se peogwir eo kroget an droug diremed ? Penn-bouloñ ! Ne c'hellit ket selaou ar c'huzulioù, biskoazh n'ho peus selaouet na sujet da alioù fur !

13. Barzhonegoù Baudelaire : *Chant d'automne ; L'invitation au voyage*

Ur c'houblad o sevel. Daoust ha poent eo mont ? Pas, ne fich ket ar gouvidi all. Ne vo fin ebet d'ar pred-se ? Pres ebet, neketa, dav d'al ludu yenaat.

En hor stal-labour emaoç'h, hag a-greiz-holl e krogit da greñañ, da vout tomm deoc'h, da c'hwezziñ, ha deuet c'hoant deoc'h da rechetiñ. Kazi echu an devezh labour. Ne c'hellan ket ho lezel da vleniañ er stad-se, hag e kasan ac'hanoc'h d'ar gêr.

En ho rann di e teu deoc'h adarre un tammig nerzh, met chom' ran ganeoc'h, nec'het, en ho kichen, war ar gourvezvank. Souezhet on o klevet, evit ur wech, ur wech hepken, e teñvalijenn ar saloñs – ne vo ket elumet ar gouloù – ho pozioù c'hweru, trist, kounnaret... Eñvorioù trenk ar skol, eñvorioù ankeniet ar c'hrennoad, eñvorioù maouez ha mamm... deroù tost ar gozhni... hag an anzañ : n'eo ket mikozañ a zo e-barzh ho peg, met ur vos-fogn o vrasaat dindan ho teod ha re ziwezhat bremañ evit e droc'hañ.

Ne c'hellit ket goût emañ o terc'hel war ma daeroù. Gouest e vefec'h d'ober goap ouzh ar plac'hig kizidik.

Ur bellgomzadenn :

– ...

– Ya, ya, emañ-hi ganin. Dre ma faot... ne ehanan ket da gomz, da gomz...

-...

- *Ya, gwelloc'h bremañ ganin. Gwir eo, ret oa deomp pellgomz deoc'h. Digarezit.*

- ...

- *Emañ-hi o vont. Ya, teurel 'raio evezh. Ne raio nemet kant hag hanter kant war an hent-tizh. Sellit dre ar prenestr : emañ-hi o tegouezhout. Bouch !*

Ha, laosk ha flak ma divesker, ho kuitaat 'ran buan, o vleniañ war an hent-tizh en noz dall-du, an daeroù o ruilhal war ma dremm, frigaset ma c'halon.

Ne vo mui pellgomzadennoù.

Pellgomzadennoù hag a bade a-wechoù un eurvezh. Ma ! Ne c'hellemp ket en em welet alies a-walc'h, tri-ugent kilometr hor ranne.

Pet gwech eskemmet ganeomp diwar-benn ar familh, al levrioù, ar muzik, hor bro, hor yezh ! Ral-tre tabut, a-wechoù kuzulioù fur a ouiemp ne vefe ket bet sujet outo.

Hag e fin un abardaez, war-lerc'h ur gaozadenn hir ha trist, troc'het gant ho paz raouliet, ar c'huzhut souezhus-se, chuchuet evel pa vije bet unan bennak ouzh hor selaou :

- *N'em eus nemet ur vignonez. C'hwil.*

Amzer din da gompren :

– *Met ho c’hoar on-me.*

– *Ya, ma c’hoar nemeti, ma mignonez nemeti.*

Surtout, chom hep diskouez ma from dezhi ! Ha war ar memes ton e respontan :

– *Memestra evidon-me, c’hwi ‘oar. C’hwi hoc’h-unan. Kudenn ebet.*

Hag an diviz a gendalc’h, sioul-tre, diwar-benn n’eus forzh petra.

Soñjet ‘m eus : « Dav dezhi bout en un dic’hoanag divent evit anzañ ur sekred e-giz-se dalc’het ken don. »

C’hoant da ouelañ adarre, met ne ran forzh bezañ remerket. Ma tiver an daeroù devus war ma divjod, da biv e vefe dav din rentañ kont ?

En ospital – abaoe tri devezh emaoch en ospital daoust d’ho nac’h – ne ra mui ar morfin kalz a vad deoc’h... lâret zo bet e oac’h gouest da zerc’hel koulskoude e-pad ur mizvezh c’hoazh.

D’ar Merc’her, tremenet brav an abardaez gant ho merc’hed. Keloù mat :

– *Mont ‘ra ! Gwelloc’h eget a-raok. Ha fental a ra ! Ha Tadig a erruo eus e vro estren, warc’hoazh abred.*

– *Ha warc’hoazh e yimp d’he gwelet ivez.*

Hag ar bellgomzadenn Yaou vintin abred. Echu tout e-pad an noz. Din-me da vont betek ti ma mamm evit kemenn dezhi marv he merc'h. Ar glac'har divuzul, an anken, ar soñj droch emañ emzivadeg eus ma c'hoar, hag on deuet bremañ e penn ar familh, ha din-me e vo dav kemer chagrin an holl familh war ma skoaz ouzhpenn ma hini.

Lâret zo bet gant plac'hed an ospital e oac'h bet kavet astennet war ho kwele, gant ho torn digor evel evit kemer ar c'hloc'hig-galv... Ha manket e oa bet an nerzh deoc'h evit pouezañ warnañ ? Skeudenn ho torn digor am hento da viken : an dorn digor ? Un doare da lâret d'ho familh « Ho karet a ran ». An dorn digor : « Goût 'ran e karit ac'hanon, ha ne zisoñjoc'h ac'hanon biken. »

Un devezh miz Eost dudioù, heoliek, tomm hep bout re domm, un aezhenn o flourañ hon divrec'h hag hon divesker noazh. Divizet war-lerc'h merenn diskenn betek ar stêr. Ul lec'h anavezet a-viskoazh ganeomp hag atav karet dreist.

E-pad ma kerzh buan hon tud hag o mignoned evit bout e freskter haleg bord ar stêr, e chomomp hon-div da ruzañ, da sellet ouzh ar runioù, ar c'hoadeier, ar chapel, kêriadenn St-Alar. Un nebeud a bozioù. Ne vezomp ket boazet da eskemm. Ul loen sovaj on deuet da vout, dilavar, ar pañsion argarzhed he deus graet he labour fall, ha n'ouzon ket mui c'hoarzhin, na vousec'hoarzhin zoken. Degouezhout a raen bep miz

hanter d'ar Sadorn noz evit kuitaat da Sul da bemp eur noz. Kousket 'raen ganeoc'h « em » c'hambr, « em c'hozi », hag e seblante din e oan deuet evel ur gouviadez em zi. Perak klemm ? Dav e oa mont betek an Termen. Met touet, biken n'ez afen da Roazhon evit bout adarre toullbac'het. Dieubet bremañ diouzh an arnodenn ziwezhañ, klask ur vicher, n'eus forzh peseurt hini, labourat en uzin zoken, mont da Bariz zoken (se lakfe Tadig da zont sot, tañpir), met chom hep gouzañv mui bout prizionadez.

Heuliañ 'reomp lezenn ar c'hoad-faou.

– Salopri ! Lusenn ebet mui ! Debret an holl lus !

– Al lus zo da dout an dud.

Chomet omp war-sav. Evel-just e c'hallit sellet ouzhin a-uhel ken kresket oc'h, ha n'eo ket echuet ! « Silienn » a daol deoc'h Tadig, pa oan-me « Yourc'hez ».

– Soñj 'peus eus ar baleadennoù a raen ganeoc'h pa oan bihan ?

– O ya ! Dav sujin da vMammig pa zeue c'hoant dezhi d'ho lakaat em favioù, dibosupl din mont pell da furchal, dav din ho stlejal ha teurel evezh na vefe ket bloñset pe grafignet ar briñsez...

– A-drugarez deoc'h 'm eus desket karet ar gweledva, an natur, ar frankiz, ar c'hornad-bro-mañ da viken.

– *A ? Ne soñje ket din.*

– *Yao, atav o sellet ouzh ar pezh a veze diskouezet din ganeoc’h. Mod-just, n’eo nemet war-lerc’h e oa bet komprenet ganin.*

– *Hag atav o c’houlenn pignat an diri betek ar ganol. Biskoazh n’em eus asantet ! Ha c’hwï d’ober ho froudenn rak ne faote ket din sujiñ, evit ur wech, d’an dimezell !*

– *Met diwezhatoc’h, ha me un tamm brashoc’h, pignet e oan betek ar ganol.*

– *Ha... ?*

– *Ur spont dirak an dourioù du difich-se. Ur wech, ha pas unan muioc’h !*

Klevet ‘reomp hon tud o komz hag o c’hoarzhin, hag ar runioù tro-war-dro a restaol deomp hekleo o levenez.

Sellet ‘ran ouzhoc’h, ken bras, rakkrennardez, ha burbuenn ebet ne zeuio da vilañ ho tremm wenn. Soñjal ‘ran trumm n’ho anavezant ket. Ha penaos em befe gallet hoc’h anavezout ?

– *C’hwï ‘oar, lennet ‘m eus holl ho levrioù.*

Ur manniel a aon. Peseurt levrioù a c’hall bout em c’hozi ? Levrioù didalvoud. Levrioù skol. Kelaouennoù droch. Levrioù talvoudus. Emichañs n’eo ket bet

lennet ganeoc'h an holl levrioù Colette, dreist-holl ar re un tammig, un tammig...orgedus ? O ma Dou', Ma Dou' ! Ar ruzder a grog da dommañ ma c'hoùg.

– Lennet 'm eus na peseurt levr, hep kompren a-wechoù. Malraux, Camus, Prévert...

– D'am soñj emaoe'h un tammig yaouank c'hoazh evit lenn ha kompren ar skrivagnerien-se.

– O ! Trizek vloaz din-me 'benn eizhteiz 'n amañ ! Ha dreist-holl lennet zo bet ganin « Ti ar Bobl » gant Louis Guilloux.

Trumm e teu din em memor da vout prenet al levr-se e ti-gar a-raok kemer an otokarr, sachet ma evezh dreist-holl gant « x » ar Guillou, lennet raktal e-pad ar veaj betek ar gêr, ha me levezonet da viken.

– Ha petra 'soñjit ?

– Dreist, dreist ! Ken tost ouzh ma spered, ouzh ar pezh a soñjan. Dav 'vo din kavout levrioù all skrivet gant ar Guillou-se, gant un « x » dezhañ...

– Ar gwad du, Bara an hunvreoù... ur mignon bras da gCamus.

Dont 'ra ur mousc'hoarzh glas war ma diweuz ha soñjal « Drol memestra, div blac'h ken null war ar matematikou, ha bet levezonet da viken gant un « x » !

*Un huanad disammet ! N'he deus ket lennet
levrioù Colette – pe, ...ne lâro netra !*

Ha chom 'ran, sabatuet, o vamañ dirak ar vaouezig-se, moan ha bresk evel ul liammenn velegan. Ma c'hoar an hini eo. Kavet adarre ma c'hoar. Karet 'ra ar pezh a garan, hag evel un taol-avel flour, skubet ar seizh vloaz a zo etrezomp. Setu-ni, evel div gevel-lerez, hag ec'h adkav ma c'halon ar memes karantez kreñv maget da vare he ganedigezh ha goût 'ran rik-rak, ne c'hallo netra bremañ terriñ ar garantez-se.

*Ma bugel, ma c'hoar,
Soñjit en douster
Da vont asambles
da vro a denn deoc'h.¹⁴*

*Met er vro-se emamp hon-div ! En-dro deomp
ar c'hoadeier, ar stêr, ar runioù, ar gwaremmoù. Ra
zeuimp adarre er vro a denn deomp !*

*Pep tra a gomze
E kuzh d'an ene
He yezh flour genidik.¹⁵*

Hor yezh flour deomp-ni, yezh hor bugaleaj
boemus...

Ha piv 'oar ma n'emañ ket dija hoc'h ene o nijal-tarnijal etre div goumoulenn a-us d'hor c'hor-nad-bro dudius, ar baradozig deomp-ni ?

14. ha 15. Barzhonegoù Baudelaire : *Chant d'automne ; L'invitation au voyage*

Kollet em eñvoriòu yaouankiz, n'em eus ket merzet e save an dud hag e oant o vont war-zu an nor e-ser en em vountañ.

Poent mont. Yen al ludu bremañ. Poent mont da Jardrin ar Memor. Poent mont da sellet dre hon daeroù o ruilhal puilh, ouzh bruzun stlepet ur vaouez hag a zo bet ur verc'h, ur c'hoar, ur wreg, ur vamm, ur vamm-gozh.

Dav din en em silañ etre an engroez, dav din en em silañ hep bout remerket.

Digeriñ 'ra trumm an nor war Mestrez an ti, ur grek en he dorn, hag en em led er sal frond ar c'hafed fresk.

– O vont kuit dija ! Met n'em eus ket servijet deoc'h ho pannac'h kafed !

Ul luc'hedenn. Ur sailh. Bountañ 'ran ar vaouez hag he grek, ha redek war-zu ar priveziòu.

Hag er gwalc'heris e tisonkan, e frond ar c'hafed fresk, ar vestl, tri devezh hep debriñ kazi, ar c'heuz, ar morc'hed, an direizhder, soñj un deiz benniget a viz Eost. Diverañ 'ra dour ar c'hog a-hed an duellenn ha skarzhañ 'ra gantañ al lorgnez trenk-se.

Koulskoude, chom 'raio da viken ar glac'har da vastrouilhañ ma c'halon, ha ne c'hello biken ar glac'har-se bout dislonket.

Peurvoulet e-ti Ouestelio, 29200 Brest
Disklêriet hervez lezenn e miz Du 2019